

Itron Varia ar Seiz Glac'har

~~15 A WENGOLO~~ 7 douleurs

(Stabat Mater, e brezoneg.)

Ton latin



1
En he sao ar Vamm a c'hlac'har
A lenne war lein ar C'halvar,
Tost d'he Mab stag ouz ar groaz.

2
He c'halon a huanade,
A glemme hag a hirvoude
Trezet gant eur c'hleze noaz.

3
O na poaniet ha glac'haret
Eo bet neuze ar Vamm garet,
Mamm dener he Mab unik !

4
Pa wele poan he Mab Jezuz,
Ar Vamm dous ha karantezus
A oa trist ha reuzeudik.

5
Piou a c'hellfe chom hep lenva,
Ma welfe ar Vamm ar wella
E-kreiz poaniou ken euzus ?

6
Piou a c'hellfe chom hep glac'har
Ma welfe Gwerc'hez ar C'halvar
O c'houzanv gant he Jezuz ?

7
Abalamour d'hor pec'hejou
E welas he Mab er poaniou,
Draihet gant fouetou garo.

8
E welas he Mab benniget
Ken dilezet, ken disprizet,
Pa c'houzanas ar maro.

9
O Mamm ar garantez dispar,
Grit d'in santout ~~er~~ ar glac'har,
Ma lenvin ganeoc'h breman.

10
Grit ma vo bero va ene
O karout Jezuz, va Doue,
Evit ma plijin d'ezan.

11
Me ho ped, o Mamm druezus,
Da skriva pep gouli Jezuz
Doun ha piz e va c'halon.

12
Er poaniou, en deus gouzanvet
Evidoun ho Mab gouliet,
Roit d'in perz, o va Itron.

13
Grit d'in ganeoc'h gouela klemmus
Ha gouzanv gant ho Mab Jezuz,
Keit ha ma vin o veva.

14
Chom ganeoc'h em-sao er glac'har
Tost d'ar groaz e lein ar C'halvar,
Setu va mennad gwella.

15
Gwerc'hez skedus dreist pep
[gwerc'hez,
Ra blijo gant ho madelez
Rei d'in lod en ho kanvou.

16
Grit d'in dougen maro Jezuz,
Saouri e Basion skrijus,
Ha kaout sonj eus e boaniou.

*Gantan grit ma vin gouliet,
gant e groaz grit ma vin mezet
ha gant e war prezius.*

18
N'am list ket da vont da zevi,
Va difennit, Gwerc'hez Vari,
Da zevez ar varn spontus.

19
O Jezuz, pa rankin mervel,
Ra c'hellin, dre ho Mamm santel,
Kutuilh lore ar viktor.

20
Pa 'z ay va c'horf gant ar maro,
Da va ene grit ma kavo
Ar baradoz frank digor.

E fin ar bloaz 1915 an aotrou person a zeuas d'ezan ar c'helou e oa lazeta ar beleg yaouank. Egile, an abostoler, bet gloazet en eur stourmad, a dremenas eul lodenn eus ar bloaz 1916, en eun ospital. Da c'houde e tistroas adarre d'ar brezel, hag e voe lazeta ivez e miz mae 1918.



Kerent an daou gloareg a voe glac'haret bras, sklaer eo. Met an Aotrou Person a voe ken glac'haret all.

Evelato ne fallgalonas ket. Eur beleg ne die morse fallgaloni. « *Maro int, eme an aotrou person, va daou vugel karet. O gwad skuilhet a dalvezo d'ar vro ha d'ar barrez. Doue ne varv ket nag an Iliz kennebeut.* »

Hag e miz mae 1919 e voe gwelet paotred vihan o tont d'ar presbital. « *Petra a zo a-nevez, paotred!* » a c'houlennas ar plac'h. — « *An aotrou person en deus lavaret d'eomp dont d'ar skol gantan.* »

Pa voe aet kuit, ar plac'h a lavaras d'he mestr : « *Emichans n'emaoc'h ket o vont da gomans a-nevez !* »

— « *Eo. Komans a ran a-nevez, ha ret eo. An Iliz he deus ezomm beleien. Kollet am eus er brezel daou gloareg. Ezomm 'zo re all en o lec'h.* » — « *Ha pet a gemerit breman ?* » — « *Pevar int. Ra blijjo gant Doue o benniga, ma kerzint war roudou an daou all !* »

PER.